

CHANSON NEVEZ.

Var sujet ann EVEREZET.

Breman pa hon dizourci a caout eun tam amzer,
Eman echuet ann eost, ha laquet er sollier,
Eman deut bars ma speret da gompozi eur son
War sujet ar graguez ha demeuz ar c'hanton.

Ewar sujet ar graguez, hac ar merc'het yaouanq
Pere a zo accoutumet da ewa gwin-ardant,
Da ewa cafe a gwin-gwen, ha tassadou gwin-ru,
Odivi, cognac ha liqueur hac ive cafe du.

Mez eur wreg accoutumet da ewa odivi,
Oblijet ha vo he goaz da zivoal deuz onti,
Da divoal onti alc'houez ar prez pehini man an arc'hant,
Ewit empech anezi da gaout pa no c'hoant.

Mez eur wreg en deus adrez hac ha rayou troyou,
Ha ray eun tol lagat d'ar goaz ha netra na vouiou,
En ped mare deus ar zun he tigueuz ar miliner ;
Dre eun devez mad ha zoc'h deut ne man qet Yan er guer.

Neuze e pignont bars er gamp, da gargan eur sahat,
Mar plich ganec'h miliner en casse din d'ar marhat
Mez mo avertis miliner ha rog ha hefet deus ma zi,
Da non pas laret guir ha leet ha ewo odivi.

Breman e vo cavet an tu da gaout eun tam arc'hant
Ha pa vo cavet ar gomer e vezo gwin-ardant,
De bonjour deoc'h ma hommer pel so meus qet o quelet,
Demp da glasq pep a vanac'h da dori hon zec'het.

En eur gontan ho doare ezont dan hostiliri ;
Petra momp ma hommer, coulz he dimp caet odivi,
Hema digasso grouez domp ha nerz enn hon izili
Me na gavan quet gwel boesson evit an odivi.

Mez dre forc d'ann ewan e teuont da vewi,
He commançont pilat ho bec, ha da zonnet hardi
Neuze teui stang-ha-stang an demi quart an dro,
Digass eta hostis, nequet arc'hant ha vanquo.

Deus quement den evo en ty ho devont consequanç,
Mez confusion en devo an dud enn ho fresanç,
Mez laret ereont on trezo, pa do guelet ho ér,
A setu aze merc'het, hac eman leun ho foufer.

Mez pa vent eru leun ha voalc'h he teuont war ar ru,
Mez ne valeont quet plen, branla a reont d'an daou du,
Unan a lar quenavo poent he dimp mont dar guer,
Mez he bennh-al ha lavar me meuz ma foar d'ober.

Me ha meuz c'hoas d'a gaout zaon, roussin ha ho len,
Hac ar butun a zo manquet bars ma zabatieren,
Antren evelse barz enn ty, da glasq zaon ha roussin,
Fouillan he ra he godel, mez arc'hant neuze quet quin.

Mez eur vaonez hardi, pehini deus quet prediri,
Ha pa ve achu he arc'hant ha c'houlén hen credi ;

Mez merc'het ar warc'hadourez dibot, ne wen ambas,
Hac a respontas ractal dezi ebars ne faç.

C'houi heuz foetet ho arc'hant barz an hostiliri.
Ha breman ha peuz an ér da houlen traou enn credi :
Dont e ra er mæs deus an ty, gant eun ér coleret.
Ann ini na nequet hardi a vo ganti spontet.

Ober a rei tro ar foar, hep mez evel-ze,
Couscoude he renq caout harp barz ma allo balle,
A nep confusion he bet ha rei tro an dachen,
Mez en devo hi zud ho welet eur sort strouillen.

Ebarz ma vezo fin d'an de, na guemer na pen na troad,
Rac ha ben hi has d'ar gær, vo red caout eur marc'h mad ;
Ha pa fell dezi parlant ema deut ar bill bras,
Passeit ar gallec hac ar latin, na war quet davantach.

Brud e we hoas deuz ar merc'het hac e ha d'ann ewach douç,
Ha ew woalc'h betec mont mew, mes ne reont quet a drouç,
Ar reze d'a vianna zo agreaploc'h da welet,
Rei a reont da gredi ha wesen sœurezet.

Ar merc'het yaouanq memeuz tra ebarz ann hostiliri,
Gwerennou gante bars no dorn ha leun ha odivi,
Me ha meuz annoudeguez war buez ar merc'het,
Kar bean hon bet, ewechou, gante ho lipet.

Monet e ran da zisclerian ebarz en abregé,
Darn deus ar marvailhou zo c'hoarveet en Guene.
Me am boa choazet da vestrez eur plac'h capabl meurbet,
A ouar poquet da lost ann tas pa ve ganti carzet.

Eun devez he bars ar foar me hem boa hi rencontret,
He bars ann hostiliri me am boa hi saludet,
Salud, bonjour plac'h yaouanq tensor ma amitie,
Contantamant ma speret, objet ma harante.

Ha doe'h ive den yaouanc, me ho salud ive,
Deut da guemer ho lod ar foar, mar he ho polonte,
Quemerit eur bannac'h liqueur, pe eur bannac'h *la goutte*
Quemerit deus ar sort eo ar guelan d'ho cout.

Ha boe eur pennat amzer haneveent he zantimant,
Me laras dezi, ar gwin-ardant zo eun dra excellent,
Ar bannac'h quenta a ewas ha rez dioutan min fall,
Mez hoant'he devoa a dare da gaout eun all.

Ha me ho houlen ive pep ha vannac'h d'am zro,
Me na maquet risq ebet, car ma mestrez ha baeo ;
Ma mestrezic ha blich d'hin, ha dreist ann holl verc'het,
Biquen enn he hompagnunez me nam bezo sehet.

Evet a sort ha garfoc'h emezi ma servicher,
Me fenos e renko em c'hondui d'ar ger ;
Allaz neuze he teuis da zonzal em memor, em speret,
Ha cetu aman eun den hac a zo goal dapet.

Nonobstant da guement ze partial a vo ret,
Mez ma na né quet evit querzet, hi dougen ne rin quet,
Mez pa voamp deut barz enn awel, hac avancet barz enn hent,
Pa zispegen diouti he coeze war ann dachen.

Ar parapluï a zo collet, hac hi zavancher zo a scleg,
Hac hi houef ha so chomet a damo hed an dreiz,
Cetu clanw bras 'plah paour, na gemer na troad na pen,
Ha me zo nehët bras gant ma mestres strouillen.

Ya clanw bras eo ma mestrez, nequet quin ewit querzet
Ret he din hil ezal var ar n'hent, ha hi lakat da gousket
Neuze me zeuis d'ar guer hac hi lezas enno
Pa hi devo cousqet avalc'h, marteze hi difuno.

Guelloc'h ve d'ar sort merc'het en plaç ho farapluïou,
Caout kiri goloet pa hefet d'ar foariou,
Ha neuze d'ha vianna, ma ne venquet wit querset
He vefent tolet he barz, hac ha vefen chareet.

Ho hass he vefe proproc'h, car ne vefen goelet
Ha quit he vefe ho dillat da vezan habimet,
Ha comotoc'h eo ive d'ar re ve deus o ren,
Car pignat ebars ar har n'euz quet quemet a boen.

Ho pedi ha ran merc'het dre ma zon doc'h mignon ;
Da vezan moderet pa ewet boesson ;
Car enn eur evan re, a offancer Doue.
Distrujan a ret ho corf, ha lahan ho hine.

Evidon me d'ho quelen me zo ive banbocher
Demeus ha barez Gourin, hac he chom er *Kerquicher*,
Me a zo eur paour qez den, gant an evach dibochet,
Mez ret ev din lezel ma renq er blaman gant ar merhet.

Hac eur vicher fall ev ive evit destum madou,
Ret he din mont er blaman da varc'hadour coëffou,
Entre ar pezh a vo uzet hac ar pezh a vo roguet,
Mar teze ha deui ha ben, da honnit ma zam boet.



CHANSON

COMPOSET A NEVEZ

ETRE AN DEN INTERESSET

HAC AN DEN FENEANT.

Voar eun ton nevez.

Me fell din implija amzer da gomposi eun disput,
Hac a rai divertissamant etoues eun nombr bras a dut,
Var sujet daou zen er bed man hac a vev en nehamant,
Unan a so interesset hac un all a so feneant.

An hini so stag e galon eus ar madou temporel,
Er moment ma sonch bianna e ret deza o lesel
Ha pa vel e vern o cresqi e zeo contant nos ha de,
Ha divempra e voasiet evit lacat c'hoas varneze.

Ar feneant ne c'honlen qen nemet ober cherio mad,
Beza distrouil en e labour hac a gorf hac a dillat ;
Marbez gret dezan labourat a enep de santimant,
An deiz varlerc'h e chommo er guer da ober e feneant.

Petra c'heuz da sourcial demeure va oll demarchou,
Me ne don qet santimantet da vezan mestr da vadou ;
Va zad ha va mam aroc din n'o deoa qet destumet,
Me fell din ober evelte pad ma vin war ar bed.

Gouel ve dit senti ouzin ha chanch crenn a zantimant
Hac ez pe eun tam peadra hac un nebeut a arc'hant
E ves estimet er c'hontre ha contet eur loden vad,
Ha da vugale var da lerc'h a gaffe eun dra benac.

Ma senten eus da avisou, e rafen un tiegez mad,
Bepret e talc'hin em memor trein va mam ha ma zad
A zo bet pel bras assambles, ac a zo et gant Doue,
Ha ni yel var ho lerc'h pa nomp et aroc deze.

Gouel ve ve laquat eur beden gant ar re zo decedet,
Evit sellat en o etat entre ma voant var ar bed ;
Me oar ervad pa veomp galvet e recomp apparissa,
Mes laquet omp labourat betec hon heur diveza.

Goude da boan ha da fatig o testum eur bern madou,
E vo an oll o clasq ar saëon da ober dit goal gollou,
Me vo exant a guement-ze pa na moqet dastumet,
Hac e teufen da brocedi n'em bezo goel goll ebet.

Ma queres ivanti proces pa ne teus qet a voyen
E yel da gorf da amanti en eur plaç a binigen ;
Me en eur alumni goulou en em bario bepret
Gant va arc'hant ba va danvez, ha te a vo prisonniet.

Pa vin digen ha disourci em plijadur o repos,
E vi o clasq saout pe guezec a erruo d'an anter-nos,
En eur goler an horrupla euz da vreg ha tud da di,
Couls e guelet eur serpent en o mesq eguet pa vi.

Pa vin eus va dol o coannia, er penn huelan placet,
E po bara zec'h paillec ha banahou dour bervet,
Ur plajat qic dirazon, d'am zud o tistribui,
Ha va daoulagad o sellet el lec'h ma plijo din.

Caër c'heuz clasq da excusou en douar e ma da blaç,
Goude da boan pa vi maro cete ama da bartach
Pevan blanquen, eur c'hos rochet ar falla vo en ti,
Eur gos lincel ha hi dresset a yelo da lieni.

Pa barlantes gant ar reson n'en din qet a enep dit
Me voar erfat n'am bo qen partach digant va zud da vont quit
An hini en deus dastumet pevar, pemp cant scoet leve,
N'on deuz quen evit heritach pa guitai aneze.

Finissomp hor c'homplimanchou, sonjomp e rancomp mervel
Ha tachomp d'en em prepari abars ma deuter d'hon guervel,
Goulennomp pardon eus Doue, hac eus hor mam ar Werc'hes,
Ha goude ar fin eus hor buez, mont oll er barados.